

Kenarroud etrevroadel a-du get an dizalc’hiezh goude 1945

- An impalaeriezhioù trevadennel(ar R-U, Frañs) gwanaet get ar brezel
- Emsavedegoù brodelour a c’houlen bout dizalc’h dre o levieren
- URSS ha SUA a zo enep-trevadennourien
- An ABU a c’houlen ma vo anavezet gwir ar pobloù d’en em ren o-unan
- Tud desket, intelektualed e-barzh an trevadennoù a c’houlen bout dizalc’h o fobloù. Levezonet int get mennozhioù ingalded , frankiz, gwirioù mab-den desket e-pad o studioù er vetropolenn (**Ho Chi Minh, Senghor, Gandhi**)

Afrika Norzh:

- 1956: Frañs a ro an emrenerezh : Maroko Tunisia get kenemglevioù get an tunisian Habib Bourguiba hag ar sultan marokan Mohammed V

1954-1962: brezel Aljeria

- Aljeria c’hall abaoe 1830, 3 departamant gall a zo enni.
- 9 milion a Aljerianed vuzulman ennañ hag ur milion a Europiz (“**pieds-noirs**” (troed du)).
- Talbenn dieubiñ broadel **FLN (Front de Libération Nationale)** a c’houlen bout dizalc’h.
- Evit gouarnamant Frañs: “Aljeria eo ar Frañs”.
- Dizingalderioù sokial, ekonomikel bras etre ar vuzulmaned hag an Europiz: feur mervel uheloc’h, goprouz izeloc’h.
- 8 blez brezel etre Frañs hag Aljeria

An didrevadenniñ 1947-1962

- Prantad kentañ etre 1947 ha 1962
- en Azia ha da heul en Afrika
- Dizalc’hiezh Indez Vreizheuriat:

Daou strollad broadelour:

-strollad ar C’hendalc’h renet get Nehru(kannad hindou a heulia reolennoù an hindouegezh)

-Ar C’hevre muzulman renet get Jinnah(kannad muzulman o heuliiñ reolennoù an islam).

Leader(levier) dizalc’h Gandhi a c’houlen an dizalc’h dre an disentidigezh sivil, an difeulster get oberoù habask enep d’an dalc’her saoz

- 1947: disklêriadur an dizalc’h ha rannadur India etre :
 - **Unvaniezh Indez** (lodenn vras hindou)
 - **Pakistan:** lodenn vras muzulman

Sevel a ra ar Stadoù daet dizalc’h an « trede-bed »

- Strollet eo ar Stadoù nevez emren ha dizalc’h e **Bandung**, en Indonezia e 1955 : disklêriadur an neptu da lâret e chomant hep bout e-barzh ur bloc’had.

- Kuzuliadeg Belgrada e Yougoslavia e 1961 > an **DIDUEGEZH (Stadoù an neptu)**

Ganet eo an TREDE BED

- Bresk eo ar Stadoù nevez ganet: brezelioù diabarzh, naonegezh, kudennoù diorren(Afirka sub-Sahara)
- **Kuzuliadeg Aljer 1973: un urzh ekonomikel** nevez er bed evit bihanaat an dizingalderioù etre an Norzh Pinvidik ha broioù ar Su paour.

- Gwalldaolioù e 1954 enep d’an Europiz.
- àr an tiriad gall en Europa, gwalldaolioù get an OAS (Organisation de l’Armée Secrète) e Pariz , evit an Aljeria c’hall enep d’an Europiz.
- Frañs a gas soudarded. Reoù Aljerian a ziviz stourmiñ get ar soudarded gall: anvet **HARKI**(ed).
- drouklazhadegoù, jahinerezh,
- 19 a viz Meurzh 1962: **emglevioù Evian** (Aljeria dizalc’h ha souveren , an troed du hag an harkied a dec’h kuit a Aljeria)

